

DILENNADEGOÙ TI-KER - 15 HA 22 A VIZ MEURZH 2026
Plougastell-Daoulaz

Nicolas Husson —

**Ensemble
Pour
Plougastell**



Ur raktres savet gant tud Plougastell

evit luskañ ar gumun en-dro !

Plougastelliz,

D'ar 15 ha d'an 22 a viz Meurzh a zeu e vo dilennet ganeoc'h ur skipailh nevez en ti-kêr. Diwar an dibab-mañ e teuo ar raktresoù da zont hag an doare ma vo meret hor c'humun.

E 2020 e vanke deomp 174 mouezh evit bezañ dilennet. Hiziv, adarre e kinnig hor strollad keodedel a-gleiz, "An holl evit Plou-gastell" ur spi evit ar cheñchamant. Ur raktres a-stroll eo an hini savet ganeomp, diazezet war ur gredenn eeun : ret eoret eo reiñ galloud d'an dud en-dro ha lakaat anezho da gemer perzh e buhez ar gumun.

Frouezh ur c'henlabour eo ar raktres-mañ, diwanet diwar ezhommoù ar vro. Dastumet hon eus muioc'h evit 300 kemennadenn digant an annezidi, ar c'hevredigezhioù hag an dud a-vicher, a di da di pe e-kerzh emvodoù 'zo. Deuet int da binvidikaat ar c'hinnigoù savet gant bodadoù-labour lañset e nevezamzer 2025.

Lojeiz, doareoù d'en em ziplasañ, liammoù sokial : ur politikerezh engouestlet ha poellek eo a vo kaset da benn ganeomp evit ober eus Plougastell ur gumun ekologel, bev, birvidik ha gant kenskoazell.

Pa votit evit An holl evit Plougastell, e rit ur choaz kreñv da gemer ar gallout en-dro war amzer-da-zont ho kumun.

An holl evit Plougastell



Ur raktres savet gant tud Plougastell
evit skrivañ ur bajenn nevez eus istor hor c'humun.

Hor promesa evit lakaat tud Plougastell er jeu



- Un eil-dilennad.ez e karg eus an demokratelezh-perzhiañ
- Digor frank dorioù ar bodadoù kumun d'ar sitoian.ez.ed
- Digor d'an holl ivez ar strolladoù labour war raktresoù bras
- Referendomoù lec'hel war intrudu ar geodedourien (RIC) hag emvodoù er c'harterioù
- Budjed perzhiañ kreñvaet gant an annezidi adalek deroù ar mennozh ha betek penn.
- Savenn niverenn kenlabour evit kinnig hag heuliañ ar raktresoù



Ha merañ ar gumun hag e budjed en un doare treuzwelus

- Gwarant ur feur dleoù mestroniet (dindan eizh vloaz)
- Tailhoù font : skornañ lodenn ar gumun e-pad an daou vloaz kentañ
- Ober implij eus kement skoazell arc'hant a zo
- Kemer e kont palioù an treuzfurmadur ekologel err c'hendiviz hentañ arbudjed (DOB)
- **Treuzwelusted :**
 - ◇ Kinnig ar budjed bep bloaz
 - ◇ Dezverkañ ar skoazelloù arc'hant roet d'an hiniennoù koulz ha d'ar c'hevredigezhioù.
 - ◇ Kemer e kont alioù an annezidi evit dibaboù ar budjed

HO C'HOANTOÙ HOR C'HINNIGOÙ



Ezhommoù ha mennozhioù pep hini war an dachenn a zo hon diazezoù evit kavout diskoulmoù. Sed amañ dek mennozh fetis tennet eus hor program evit ur gourenez vuhezekoc'h, leunietoc'h a gengred ha padusoc'h.



Muioc'h a fiñvusted : kêrioù, bourc'h, kêr-Vrest

Ni a fell deomp gwellaat an transportoù hag ar fiñvusted doujus evit liammañ gwelloc'h ar c'herioù kenetrezo hag evit diskar implij eus an otoioù.

- Kreñvaat al linennoù bus gant meurgêr Brest (busoù da vont-tre er vilajennoù pe busoù a live servij uhel war bont Albert Louppe da skouer).
- Diorren ar roudennoù-velo suraet
- Kas war-raok ar feurmiñ marc'h-houarn (e ment ar gumun)
- Rouedad kenweturiñ pe kenlodañ otoioù
- Harpañ ar Pass Bibus da 10€ evit ar re yaouank



Divizout asambles an dazont a vo hini skol Gwaremm-Gozh

Dazont ar skol a savimp gant tud Plougastell en ur grouiñ ul lec'h boutin D'an holl, kreizenn sokial an Astérie ennañ, dindan servij ar vuhez a-gevred hag ar c'hengred.

- Hentenn ar c'hensevel ken abred a 2026, gant ostilhoù amprout, gant ur steñvenn spis hag ur budjed mestroniet
- Komiteoù o vodañ ar greizenn sokial, an annezidi, an dilennidi, ar c'hevredigezhioù hag implijidi an ti -ker
- Emvodoù publik ha gweladennoù er vilajennoù

Kinnig lojeiz d'an holl hervez o moaien



*Ni a fell deomp e c'hello an holl kaout bod dereat, desachañ annezidi nevez
Ha kinnig diskoulmoù azasaet evit ar c'houpladoù yaouank, ar re gozh hag
an tiegezhioù gant un tad pe ur vamm dreist-holl.*

- Krouiñ un ekovilajenn er vourc'h ha diorren lec'hioù-bevañ
skañv aes d'an holl
- Adtapout an dale tapet e-keñver al lojeiz sokial
- Feurmoù fetis a gengred evit stourm ouzh ar brokerezh
- Degemer ur youl ret a-fed ekologiezh evit kement raktres a zo
- Broudañ da reneveziñ tost da 400 a diez chomet dibourvez evit
kinnig anezho d'ar werzh/feurmiñ

Lakaat ar vilajennoù da vevañ



*Ni a fell deomp sikour tud o chom er vilajennoù ha tostaat outo ar servijoù
publik hag ar c'hultur.*

- Burev-pad evit skoazell goulenn gwirioù ha sikour melestradurel
- Kreskiñ efedusted ar bulzun Avel'Tad
- Krouiñ darvoudoù laouenek, arzel ha sevenadurel er vilajennoù
dorn ha dorn gant tud ar vro, dre un ostaleri war rod
- Sikour ar c'hevredigezhioù a lak ar vilajennoù da vevañ

Lakaat ar vourc'h da vezañ ur

greizenn buhezek en-dro.



*Ni a fell deomp adaozañ ar vourc'h ha reiñ startijenn dezhañ gant ar pal
desachañ an annezidi hag ar weladennerien.*

- Sikour evit ar stalioù-kenwerzh da ziazezañ dre feurmoù a gengred
- Adaozañ an tremenerezh hag ar parkañ.
- Muioc'h a blas evit an dud war droad ha war varc'h-houarn,
mont-tre aes d'an holl (tud nammet o c'horf)
- Lakaat muioc'h a plant er c'hreiz-kêr
- Reneveziñ feunteun plasenn ar C'halvar
- Arvestoù hag abadennoù digoust er straedoù



Lab intrudu ar re yaouank evit an dud

etre 16 ha 25 bloaz : ul lec'h gouestlet d'an ijin, d'ar c'hrouiñ

Ni a fell deomp reiñ d'ar re yaouank ul lec'h hag ur skoazell evit o raktresoù, dezho da gemer muioc'h a berzh er vuhez lec'hel.

- Krouiñ ul lec'h gouestlet d'ar re yaouank : labour, stalioù, emvodoù ha spered-ijin
- Ambroug anezho da sevel o raktresoù ha da gemer perzh er vuhez ar vro
- Kenstrollañ oberourien ar yaouankiz, ar c'hevredigezhioù, an ensavadurioù-skol hag ar c'hluboù sport
- Harpañ ar raktresoù arzel, micherel, kengred ha sportel solidaires et sportives

Diskoulmañ kudenn skarzhañ

dour lous er gumun



Ni a fell deomp kuzuliañ an annezidi war-zu diskoulmoù ekologel hag aes d'an holl evit gwareziñ kalite an dour, al lenn-vor ha yec'hed an holl.

- Arsellout e pelec'h emañ an draenoù er gumun en ul labourat dorn ha dorn gant Eau-du-Ponant.
- Sevel ur strategiezh-ober dre dakadoù Plougastell
- Reiñ sikour d'ar raktresoù-stur evit ar skarzhaj a-stroll pe hiniennel (fitoskarzhaj evit bezañ resis)
- Harp evit lakaat reolennañ ar stalerezhioù hiniennel (skoazell arc'hant evit an tiegezhioù ezhommekañ)
- Krouiñ ul lec'h titouriñ er gumun evit a sell ouzh ar skarzhaj, stroll pe hiniennel

Muioc'h a voued bio er c'hantinoù-ker



Ni a fell deomp gwellaat kalite ar predoù servijet d'hor bugale (yac'h, lec'hel ha doujus eus an endro).

- Kreskiñ sansupl lodenn ar produioù bio ha lec'hel
- Labourat gant ar broduerien bio lec'hel
- Diorren ti-feurm ar gumun
- Hep koust ouzhpenn evit ar familhoù ezhommekañ

Digreskiñ fraostoù ar gumun



Ni a fell deomp diarbenn fraostadur an tachennoù-douar evit mirout ouzh ar gwalldanioù hag aesaat reoliañ ar spesadoù aloubus.

- Ober war dro ar fraostoù nann-mestroniet dañjerus evit an tiez da gentañ
- Diharchañ da gentañ penn tro-dro d'ar c'heriadennoù arvarus, gant sikour ar gumun hag a-unan gant ar berc'henned
- Kinnig da berc'henned 'zo e vez kempennet o logenn douar
- Krouiñ ur mirva font evit al labour-douar a sikouro labourerien-douar bio d'en em staliañ.

Krouiñ sal ar gouelioù



Ni a fell deomp reiñ ul lec'h azasaethag aes ober gantañ d'ar c'hevredigezhioù ha d'an annezidi.

- Krouiñ ur sal cheñch-dicheñch gouest da zegemer nebeutoc'h a dud evit en Avel-Vor (etre 50 ha 300 den)
- Lakaet e kerzh ar c'hevredigezhioù evit netra
- Lakaet da feurmiñ gant prizioù izel evit tud Plougastell

Hag evit ar brezhoneg ?



Evit ur yezh hag ur sevenadur breizh bev :

- Tuta un den brezhoneger en ti-ker evit merañ politikourezh ar yezh ha kavout ul lec'h evit degemer an holl abadennoù ha kevredigezhoù liammet gant ar brezhoneg.
- Krouiñ ur greizenn dudi e brezhoneg
- Aozañ ur Fest ar brezhoneg ha sevenadur Breizh en Avel Vor
- Gant ar mirdi, dastum testeni ha roudoù eus brezhoneg Plougastell
- Kenderc'hel gant ha mont betek live 4 karta Ya d'ar brezhoneg
- Skoazell ar skolioù divyezhek ha Diwan